

## G U E R Z

*Var sujet un Den Yaouanc a voa deut da baea  
pêvar scœt goude e varo.*

750 A

**S**PERET-SANTEL, anflamit va speret,  
Da gana ur c'hantic evit ar Vretonet,  
Var sujet un exempl pehini so âruet  
Ebars e Breiz-Izel, e mis Du tremenet.

Crena ra ya c'halon ive va oll memprou,  
Va daoulagad ne reont nemet scuilla daelou,  
O tont da gonsideri peguen trist eo ar matier:  
Goulen a rân sicour eus ar Verc'hes santel.

Unden yaouanc, siouas, voa n'em abandonet,  
Goude ma voa maro e dud gant ar e'hlénved,  
Avoa n'em abandonet da bep seurt tristidiguez,  
Da bep sort tristidiguez, dapep sort paourenteuz.

Evel ma voa yaouanc, ne grede clasq netra:  
Tud vad, dre charite, a gasse tamou dezâ;  
Evel ma voa yaouanc e teujont d'er scandalat,  
Pa ne gare sevel ha mont da labourat.

Souffr a ra mil injur gant guir baciantet,  
Laqat e fizianç er Verc'hes beuiguët,  
Dre m'en devoa he imach hac hini ar bassion,  
Ha ma rê diraze beudez e orêson.

Un ozac'h eusarc'hontre, un den eus arc'harter  
 A deuas d'e velet, o clêvet e viser,  
 En eur lavarat dezàn : deus d'am zi da labourat;  
 Ar paour-qès a respontas : ne meus qet a zillad.

Gouzout a rân certen labourat an douar;  
 Mes, allas ! eme'r paour, ne meus na pal na mar:  
 Pêvar scoet a vancfe din evit en em eqipa,  
 Me a yêlo d'ho ty sur evit ho paea.

An ozac'h var ar guir a ro ar pêvar scoet,  
 O lavarat dezàn : Ya mignon, ne vanq qet,  
 En ur lavarat dezàn : Deus d'am zy da labourat  
 Pa po bet paf ha mar ha prenet da zillat.

Monet a ras d'e dy, ma voe ur pennad mat;  
 Plijout a rè dese certen da labourat;  
 Un deiz dreist ar re all e voent meurbet estonet  
 O sonjal er paour-qèz pelec'h e voa chommet.  
 Ma ejont da velet, ma voe cavet maro  
 Ebars en e gampric var un dornad colo.

Lienet voe gorf vit beza entêret,  
 Ar brud a zavas prest, ma teuas tud d'e velet;  
 An dén-mâ' deuas ive vel m'oa deus ar c'hanton,  
 A deuas d'e velet. O Doue, bebes eston !

Pa zorti eus an ty, d'an dud e lavare:  
 Orato birviqen e ene ne antre  
 En barados Doue, qen en devezo paet  
 Ar pez a rois dezàn neus qet pell pêvar scoet.

Dre ar c'homzou terrapl pere a brononças,

D'oun penaüs an douar d'e lonqa na zig oras ,  
 Oc'h arrêti un ene a voa o vont d'ar joayou ,  
 A vije recevet gant Jesus en ênvou.

Ar Verc'hes glorijs Vari, dre ma voa dei fidel,  
 A accordas ur mennat evit he servicher,  
 Ma teuje var an donar un instant da labourat ,  
 Evit monet d'an ty da baea ar barbar.

Monet a ras d'e dy ha ma voe recevet ;  
 Goujen a ra labour, ma voe dezän roet ;  
 Labourat a ra er parq qement hac en tri guella ,  
 Ar pez zo estonus , hep debri nac eva.

Pa zeu couls ar repas, caer e vije'r pedi  
 Evit monet gante assambles da zëbri ,  
 Eu ein denne a goste, hac eno var e c'hinou  
 En em string d'an douarevit souffr e boanion.

Dont a ra'n usuiller , qemer a ra eston ,  
 Hac én monet ractal da laret d'ar person  
 En devoa ul labourer hac a rë qemént ha tri ,  
 Ar pez so estonus , hep eva na debri.

Ma , eme ar Person , continuït bepret ,  
 Brêmâ souden vatant me yélo d'e velet.  
 Pa êruas er parc , dre bermission Doue ,  
 E hanavezas pront penaüs voa un ene.

Me conjur, eme'r Person, lavardin, me a ped ,  
 Ne qet hirio eiz de em boa da gorf entëret ?  
 Petra a zefot dide? petra a glasques amâ?  
 Petra a zefot did evit da zelivra?

Pêvar scoet am boa bet digant mestr an ty-mâ,  
 Op deut dre vouir voyen sur evit o faea:  
 Oh ! elec'h pêvar, eiz certen a vezo roet,  
 Ur veach, ene paour, qen a vi delivret.

Ne meus qetar pouar da antren er joayou,  
 Nemet gant va Æl-mat e clêfen ar c'hêlou :  
 Pedit Done evidon, me a za prest d'an êvou ;  
 Varc'hoas d'ar memes heur me rento ar c'hêlou.

Dont a ra ar Persen da zigas an arc'hant,  
 Ma vije delivret a boan hac a dourmant.  
 Me, eme an ene, am boa-int bet digantân ;  
 P'oc'h eus ar vadelez, me o rento dezân.

Pa astennas e zorn da guemer an arc'hant,  
 E santas an ardeur, e boan hac e dourmant.  
 Evrec'h deo betec e scoa en instant avoe dèved,  
 An arc'hant eus e zorn d'an donar zo quezet.  
 Adieu, Autrou Person, mie ya brêmâ d'arjoayou,  
 Me bedo evidoc'h Jesus-Christ hon Autrou.

Pa dleo un den dêc'h, pa yekeus ar bed mân,  
 Elec'h desirout droug, pedit Doue gantâ :  
 Pedomp bepret ha meulomp ma zefont da repos  
 Ha da veuli Doue en gloar ar Barados.

**F I N.**

## GUERZ AR GARNEL.

---

DEMP d'ar Garnel, Christenien, guelomp ar  
religou  
Eus hor breudeur, c'hoareset, hon tadou ha  
mamou,  
Demeus hon amezeyen, hor brassa mignonet,  
Guelomp ar stat truezus e pini int rentet.

Guelet a reot anezo torret ha bruzunet,  
Ha me mesan darnvia a so e poultr rentet;  
Ne veler mui o noblanç, o danvez, o guenet,  
Ar maro hac an douar o deus o distrujet.

Ar paour hac ar pinvidic, armestr hac ar sujet,  
Oll e zint rentet henvel, oll int disevelebet;  
Ne zeus mui nemet esqern, poultr ha brei-  
nadurez,  
Dign eus a gompassion hac eus a bep truez.

Hoguen er stat truezus e pini int rentet,  
E parlantont e langach mud eloquant meurbet  
Ous peb-unan ac'hanomp, mar qeromp profita  
Qeit pa plijo gant Doue hon lezel er bed-mâ.

Clèvit eta anezo, ha grit attantion,  
En dezir da brosita eus a greis ho calon:  
Lavarat a rin deoc'h e zint bet er bed-mâ,  
Hac e varyfot evello pa sonjot nebcuta.

Nisobet var an douar orën qercouls hac'houi,  
 O parlant hac o vale, oe'h eva, o tebri,  
 Ha cetu amâ bremâ er stat ma zomp rentet,  
 Goude m'omp bet en douar o vezur ar prénevèd.

M'oaun den crén hagalant, hame un dijentil,  
 Me voa un den pinvidic, ha me un den habil,  
 Me meus collet vanoblanc, hame va oll danvez,  
 Me va nerz ha va guenet, hame va gouizieguez.

N'hon eus cavet er bed-mâ nemeth hon œuvrou  
 mad

Da bresanti d'hor Barner, d'hon Roue ha d'hon  
 Tad.

List eta madou'n douar, detestit ar viéou,  
 Hac ornit mad hoc'h ene a hep seurt vertuziou.

Margoulennit'diganemp pelêc'h êt hon eneou,  
 Ni responso : d'ar purgator, rac ounnes ê hor bro:  
 E maint en tân o têvi vit peur-baea o dle  
 Contractet var an douar da justiç un Dôue.

Eus a ouelet ar flammou ne cessons o'rial,  
 O c'houlen ho pedennou, ma ellint sortial  
 Eus ar prisoniou teval e pere int tolet:  
 Hastit, bastit d'o zicour, ha ne zaleit qet.

Dêc'h-hu en em adressomp, qerent ha mi-  
 gnonet,  
 Da gaout memor ac'hano mp pa zeot dre ar vêret,  
 Lavarit en ur dremen : Doue ra bardono  
 D'an anaon er purgator, rac honnes ê hor bro.

Un aluzen, ur beden grêt gant devotion,  
 Ur yun pe un oferen, pe ur gommunion,  
 A ell calz hor soulagi, ha berrat hor poaniou,  
 Hac on tenna en un instant a ouelet ar flamou.

C'houi, Béleyen charitabl, en eus hor c'hun-  
 - duet

En hent hor silvidiguez, pa edomp var ar bed,  
 Cuntunuit c'hoas un nebeut da gaout truez ou-  
 zomp,

Oc'h ober, dre drugarez, œvrou mad evidomp.

Ispicial o pedomp pa deuit da celebri  
 An oferen en Ilis, clêvit neuze hor c'hri  
 Eus a ouelet ar flamou o c'houlen diganeoc'h  
 Ma teuot d'ober gant Doue dre'r sacrific hor  
 peoc'h.

Ha p'or bezo peur-baet ar boan dleet d'hor  
 pec'het,

Ni hor bezo deoc'h neuze digant Doue reget.

Pedit, ni a rai ive; en em sicouromp oll,

Ennes vez ar voyen ne dai den da goll.

Evel an dour o vouga an tan-goall alumet,  
 An tan eus ar purgator a vez ive mouget  
 Dre ar sacrific santel offret var an auter,  
 Da c'houlen hon delivranç ous Doue hor Zalver.

Pa zorti an eol squeudus a zindan ar gouabren,  
 Ar bed-oll en un instant a receo sclêrijen :

Ni a zortio ive sclêr evel ar steret  
 Eus ar poaniou a souffromp dre'r sacrific offret.

Adieu, tadoù ha mamou, breudeurha choa-  
reset,  
Adieu, qerent, mignonet, adieu dêc'h, tud ar  
bed;  
Ni a ra bremâ deoc'h hor c'himiad diveza;  
Adieu deoc'h : qen a vo e traouyen Josapha.

Roit ar repos éternel, va Jesus, va Autrou,  
D'an oll eneou décedet pere so er flammou  
Ebars en ho parados da veuli da james  
Assambles gant an oll Zenthia gant an oll Elez.

**F I N.**

